



ASEM (Plougerne)

Kinnig labour embannet d'an / ar lund 23 juin 2025

Lec'h : **Plougerne**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh

distro 2025

Deskrivadur ar post-labour

Emañ AEP DIWAN PLOUGERNE o tuta ur skoazeller.ez skol-vamm evit distro-skol 2025-2026

Ur gevrat PEC hini eo. Post da vezañ pourvezet adalek ar c'hentañ a viz Gwengolo evit daouzek miz (21,5e /sizhun ingalet war ar bloavezh). Pe ur gevrat termenet he fad a c'hell bezañ.

KEFRIDI :

Ar skoazeller.ez a raio war-dro ur c'hlasad lies-liveoù skol-vamm dindan aotrouniezh ar skolaerez :

- Skoazell ar skolaerez evit degemer, ambroug ha diwall ouzh surentez ar skolidi
- Prientiñ pe/ha buheziñ stalioù-labour
- Ober war-dro ar skolidi ha buheziñ ehan kreisteiz
- Ober war-dro hag ambroug ar skolidi e-kerzh ar pred er c'hantin
- Buheziñ an amzerioù diavaez skol (diwallerezh) en un doare emren
- Prientiñ ha kempenn ar salioù klas hag an dafar

Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

- Brezhoneg komzet
- Skiant-prenet gant ar vugale
- Bezañ plijet gant ar labour skipailh ha kaout intrudu
- Anavezout lusk hag ezhommoù ar vugale
- Barrezhioù war ar buheziñ
- Perzhioù daremprediñ

Kasit ur CV hag ul lizher emginnig da : aep.plougerne@diwan.bzh

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://diwan.versio.fr/br/offres-emplois/asem-plougerneau-300620252019>